

KIMIAD EUR PELERIN.

Var eun ton ankenius.

C'hoas eur ganouen neve d'am bro gaër Breiz-Izel,
C'hoas eur verz d'ar Vretonet araug ho dilezel,
Eur verz d'ar beferinet pere bign diarc'hen,
Da ilis-sagr Remengol (1) da ober ho feden.

Salud, douar burzudus, var bini bep kamad
A faka dañlou a joa da zont em daonlagad;
Salud! d'ar guël ac'hanout, gant kement a zo bet,
Cetu ma sao dirazon an amzer dremenet.

Aze, en draonien, 'mar Faou, kær ar markis dister (2)

(1) Remengol, ar gaëra ac ar santela ilis a Vreiz-Izel, a zo bet savet gant ar Roue Gralon, en enor d'ar Verçhes, goude ma voa beuzet Kær-Is.

Abaoue an amser-ze, meur a Escop, ac hon tad santel ar Pab, e eunan, ho deus roët calç a Brezanchou, ac accordet induljanson bras da ilis miraculus an itron Varia *Remed-oll*, ac, hervès an dud coz, peb guir Vreton, a gle, eur veach, da viana, ober, *beo pe varo*, pelerinach Remengol.

(2) Markis ar Faou, ha calç a real evel-dân, a drete, en amser-ze, an dud, calç gouassoc'h evit na dreter, hirio, ar ehas. Sant Judulus ha sant Tadee, daou religius a abbaty Landevennee, pere o devoa rebechet dezan e vuntrou hac e fallagriès a voa lazet gantan; sant Judulus en ilis abbaty Daoulas, oc'h an anter, e pad an oferen bred, ac ar muntre, en eur sevel, en èr, e gleze, ru gand ar goad, a lavaras d'ar tobt, neuse, allas, en esclavach!!...

Grik, Daoulasis! ... pe me rai deoc'h oil kemend-all....

Sant Tadee, pini a allas tec'het, a voa lazet, gantan, var bord an ôd, dirac Landevennee.

Doue a deuas, pront, da bunissa Markis ar Faou, digas a reas var e zouar eur serpent eñzus, pini, goude beza lonket e vab èna, a zistrujas an dud, al loanet hac an ed. Ar Markis a zizec'has var e dreid, gant an disesper. Sant Pôl, a voa neuze, eskop e Leon, mont a reas ar muntre d'en pedi da zelvira e zouar, eus eun aneval ken estrang. An Escop santel, enem rentas en ilis sacr Remengol, pedi a reas eno, Doue ac ar Verçhes da gaout true eus ar Faouichen, pere a voa c'hoas tud barbar, prezec a reas dezo an aviel, a goude bea gret sin ar groas var ar serpent, e tolos e stôl en dro d'e c'houg, en eur lavaret:

« En hano Doue, ac en hano an itron Varia Remengol, or-
« dren a ran dit, heuil ac'hanon. »

Ar serpent a oboissas, ractal, ac a heuillas, evel eun oan, ar sant, pini er c'hunduas var boues e stôl, betec enès vas, ac en tolas er môr, el lec'h hanvet, c'hoas, hirio, toul ar serpent

A dreuzas sant Judulus e c'harz treid an auter,
Ha goude goad sant Thadec didrue a scuillas
Er barres a zoug brema an hano a Zaou-las.

Du-ont, e traon Mene-C'hom, var eon da dybidy (3)
Landevennec a velas hor c'henta abatty;
Du-ont e varvas e peoc'h mab ker ar zantes ven,
Ha roue ar C'hernevis, scuiz gant e gurunen.

Mæs brema an tremeniad, en abatty gollo,
Na gao nemet revinou, gryet gant an hillo:
Ar venach a zo kousket, dindan an douar ien,
Ha netra muy na glevont, nemet moës ar gaouen.

Huelloc'h sant Caourintin, kenta escop Kerne,
A ras, e c'hleus eun derven, pinijen, er Mene,
Hac en tu-al, var ar môr, dirag Douarnenés,
Kær-Is, guech-all, a zave evel eur Rouanes.

Pelec'h emoude breman, kenta kær an Arvor?
Pelec'h 'ma da balechou, da bobl ha da zec dor?
Pelec'h 'm'al lestri-ze, en da borz atao prest,
Pere lampe var ar môr 'vel kesec digabest?

Muy netra: na porz, na lestr na pobl, na ty, na men!
Var ben ar gær gonfontet ar bagou a dremen,
Har ar môr, epad an noz, gant moëchou a c'hlac'har
A ruill en eur luskellat ar stered hac al loar!

Te ebken a zo chomet, var men ru Teutatès (4),
Te ebken, a zo chomet, templ santel ar Verc'hès,
Zo chomet hac a chomo pell c'hoas var lerc'h Gralon,
Evit testeni a fei d'an oll dud a galon.

Cetu aman dirazon, tro-var-dro, daoulinet,
Bugale Leon, Treger, re Guerne ha Guenet,

(3) Tybidi, da lavaret e, *ty-da-bedi*, enezesnic vian, etre ar
Faou a Landevennec, e pini, e pad tri bla, e chomas sant
Guenole gant e ziskibien, araug mont da Landevennec, en tu
al d'ar voas vôr, e pelec'h e savas eun abatty, en pe hini zo
bet kement a zænt ac a dud a skiant.

Gralon, roue Kernevis a varvas, e Landevennec, e tre di-
vrec'h e vignon, sant Guenole, mab da sant Fragan a d'ar san-
tes Ven. Sant Guenole en deus meritet, dre e vertusiou, an
hano caër a *Æl Breiz-Izel*.

(4) Ar roue Gralon araug sevel ilis Remengol, a reas discar
Men-ru Teutatès, hanvet ive, *Ru-men goulou*; var ar men
ru ze e vige sacrificiet, da eun doue barbar, tud veo, ac eur
veach er mis, eur buguel bian c'hoas euz ar vrôn,

Cetu-hint , a vandennou , kosni a yaouankis ,
Heruet a bep coste ha guisket e peb kis.

Collet e ganec'h , breudeur ! ho toueou maro ,
Collet ho toliou-mein-ru , collet mar an dero (5) ,
Collet gant darn ho bleo hir , gant darn ho bragon bras ,
Mæs en oc'h oll galonou ar fei a zo beo c'hoas.

Lavar din-me , goustadic , plac'hic yaouank tener ,
Perag var da zaoulin noas he rez tro an auter ?
Lavar c'hoas , lavar din-me na perag he voëles ,
He voëles en eur bocad da dreid sagr ar Verc'hes.

Te a zistroio , d'ar gær demeus an ilis-man ,
Ha me am beus dilezet oll kement a garan ;
Te deu couscoude gant joa d'ar pardon da bedi ,
Ha me gant tristidiges , me deu da kimiadi.

Kenavo , Brest , ar c'hrenva deus kæriou Breiz-Izel ,
Pini a zalc'h chadennet c'hurunou ar brezel ,
Ar c'hurunou a laka tro-var-dro , pa drouzont ,
An douar , deus ho c'helevet , da grena gant ar spont.

Kenavo , lec'h m'on ganet , kenavo coat teval
E c'hreis pini e santen va c'halon e tridal ,
Pa voude an avel foll , en eur bija ar goën ,
Ha pa ruille gant luc'hed , c'harros an tan en eñ.

Kenavo da Gastel Pôl , kenavo d'ar studi ,
Ha d'ar môr rust a garen da velet o coëñvi ,
Ha dide , tour-sonn Kreis-Ker , leun a steredennou ,
Pini gant da groas houarn a freg ar goabrennou ,

Kenavo , sant Caourintin , da cathedral brudet ,
D'ar ghler a chom e kichen ar Ster hac an Odet (6) ,
Ha d'an ilis m'am c'hargue Doue deus e zoujanz ,
Pa bigne , d'ar beden-noz , ar c'han gant an ezanz.

Kenavo dec'h , va mam vad , plac'h fur herves Doue ,
Da bini e zon diou vech gleour deus ar vue ,
Kenavo !... mæs va daëlou a red en desped din ,
Caled e ar blandeden , pini a stourm ouzin.

(5) *Ar Var* , hanvet , hirio , Louzaouen ar groas , a repre-
sante d'ar vrettonnet coz , dre na varv jamaes , immortalite an
ene , ac a voa sacret evito , pa zivoane var an dero. An Drui-
det , ho Belæien , he zroc'he gant eur fals aour , var fin ar goan ,
er c'honec'hvet nosvez eus al loar neve , ac e troad an derven
ma vije cavet , e celebrant eur goël bras ac e lac'hent daou
daro guen.

(6) *Ar Ster* ac an *Odet* , diou rivier Gemper , var bord pera-
ema ar seminer.

Ha te, joa va daoulagad, va doussic Guenoli,
Caëra bleuen an Arvor, c'hoar ena al lili,
Pa n'allomp, hon daou beva, hon daou mervel er vrô,
Sivoas ! kenavo, sivoas ! kenavo, kenavo !....

Pa vin-me pell diouzit, ha ne golli te ket,
Ha ne golli ket ar zong demets an divroet
Na dont a ri te aman, ellec'h ma na m'o den,
Na dont 'ri gant da zaëlou da scuilla da beden :

Abardaë hor c'himiad, en eur ziscuenn an ên,
Te lavaras : — Va mignon, pa vi et diganen
Pa vi et pell da vrô c'hall, p'e guir e red dit mont,
Sell a vichou, m'am c'hares, deus ar stereden-zont.

Ha me kerkent a zavas va fen gant melconi,
Ha pa velis en envou ken caër o lugerni
Pa velis da stereden, e respontis ractal,
E respontis evel-hen, va daoulagad teval :

— Guenoli, m'hen tou, aman, hanaout a rin bepred
Hanaout 'rin da stereden e toes an oll stered,
Hac hi, bep abardaë, hi dit a lavaro :
Da gloarec douss d'a gare, d'a gar ha d'a garo ! —

Hac en eum dispartichomp, var al lec'h, hep dale,
Hep gallout muy ranna gir an eil deus egile,
Ha netra dindan an ên, netra var an douar
Na voë ha na vo bihen henvel deus hor glac'har.

Guerc'hes sagr a Remengol, m'ho ped var va daoulin,
Henchit, henchit ac'hanon en hent beteg ar fin,
Tolit eur zell a drue var bugel an Arvor,
Ha lakit en e galon nerz, ha fei, hac enor.

Avoallac'h beteg vremen m'eus bet a drubuillou,
Evet am beus em c'halir avoallac'h a zaëlou :
Roit 'ta eun neubendic a joa d'am yaouankis,
C'hui pini rô, pa garit, d'ar roz goënvet ar glis.

Mæs ceta 'noz, mont a ran... pell ouzoc'h me velo
Ho tud paour ha mac'haignet var ha zorchen golo,
Ho pelerinet ker stank hac ar bleün er balan,
Hac ho templ sklerijennet a lugern 'vel an tân.

Evel-se e kimiadas, gant cals a gomzou-all,
'Kimiadas ar pelerin a ie varsu brô c'hall,
Hac e pedas eur pennad, daoulinet var ar men,
Ha goude, 'tisparissas, 'vel eur skeud a dremen.